

KIMIAD AR MOUSIK BIHAN

104

Kenavo mamm, kenavo tad,
Hirie e renkan ho kwitad ;
Deut eo devez an disparti,
Chom gan-ec'h, siouaz, n'hallan mui !

Kenavo, ma breurik Fransez !
Nag a veach, gant levenez,
Hon euz c'hoariet war an aot,
Hag er prajo 'mesk ar yeot !

Kenavo, ma c'hoar Janedik
Karanteuz 'vel eur goulmik ;
N'hellfomp pelloc'h 'barz ar chapel
Pedi hon-daou a vouez huel !

Da vihanan, pa vin du-hont
E-kreiz ar mor braz divergont,
Me 'vo kennerzet o sonjal
E pedi 'vid-on 'vel gwech-all.

Kenavo, ma zi bihan koz
Ouz ar wall-amzer serret kloz ;
Enn-out 'c'h on deut war an douar :
Da gwitât a ran gant glac'har !

Kenavo, ma bagik kempenn,
Ken koantik gant da welio gwenn ;
N'ez pagein ken er poull-dour
'Vel gwech-all, pa oan dilabour.

Nag a blijadur em euz bet
Ouz da welet ken herr kaset
Gant an disteran lomm avel.
Kenavo, paour kez c'hoariell !

Kenavo, iliz ma farouz,
Ken kaer evel eur baradouz :
Enn-out 'm euz bet ar vadeiant,
Ha, goude, meur a zakramant.

Kenavo d'ec'h, den a iliz,
'N euz disket d'in ar c'hatekiz :
Sonj em euz deuz ho kentelio ;
Heuilh mad a rin hoc'h alio.

Kenavo d'ec'h ive, Breur ker,
Spered lemm ha kalon zeder,
C'houi hag an euz disket d'in-me,
Gant kalz a boan, an A B C.

Kenavo d'ec'h, bugale 'r skol ;
C'houi a zo ma mignoned, holl.
Pa vo an avel o krozal,
Pedet evid ar mousik fall.

Peb-hini, war an douar-man,
'N euz e blanedenn da heulian.
Ma hini eo redek ar mor
Ar bez braz-ze bepred digor.

E miz Gouev 1899.

no 208 février 1899.

An Tremener.